


Breman 8, ru HOICHE 35000 ROAZON

12 ltr

bremañ

MEURZH 1987 Niv.66

DIWAN AVEL AR SPI



AVEL AN TREC'H

Jean-Yves Cozan contre les « jacobins »

ouest
france

KORN AL LIZHIRI



Krog eo adarre Garan ar Meur da damall ar gristeniezh, ha war Nn C'haevrer BREMAN e-mañ o restañ komzoù an Ao. JULIEN, ara'heskob hoazon, diabar benn ar sida, evit o dizarbern, dre mas eo mesket moarvat ar guden-mañ gant hini un doare revelezh nad eo ket diouah doae an Ar'el. Hogen, evel ma lavar ar gallegion, 'skeñ e-kichen' a ra Garan, pa vez o tegas war an doubter evezhia-dennou gant FREUD diwar-benn noazusted, -emezañ !, - ar gre-denn gristen ouah ar revelezh. Ya, c'haevrer gant a ra hon c'heneil, rak n'eo ket gant ne vern peseurt revelezh e vez degaset ar sida, evel ma oar an holl.

Penaos e kred c'hoash Garan reñ da grediñ emañ ar gristeniezh enep d'ar revelezh ? Ha me un tad kristen ac'hanon, e Lavaran, gant an Ao. JULIEN a-hanzad, rak net eo lenn kement tra en deus skrivet pe lavaret war ar guden-mañ, -ez eus ur revelezh vat ha reiah, unan a vez santelast soken gant ar briedelezh.

Hogen, mar ez eus ur revelezh vat, ez eus unan fall ivez, ve anat eo, o warn diouah pesh a weomp bemdez. Ha mar en dije bevet Sigismund FREUD bre-mañ, en dije ranket reiañ e venozioù e-keñver an doare ma vez ur bern tud hiziv an deiz o ren o revelezh. Droch eo enta degas, er bloaz 1987, e-skud reus ar sida, evezhiadennoù gant un den evel FREUD, bet brudet en e vare evit kalz traoù o ternañ d'ar bredelfennerezh

en doa injinet evel un doare kofeserezh. Koll tachenn avat o deus graet lod eus e venozioù, dreas dre ma n'en doa ket gouezet dezarnañ ervat na, -forah penaos, - en un doare don spredelzh an Avel, koma Doue, diwar-benn ar revelezh.

Bezet e vezo, ne vije ket FREUD bremañ diot a-walc'h evit klask difenn lod eus e venozioù; koustet a gousto, mar en dije da warn darvoudoù ken skrijus ha hini ar sida, kleñved ma ranken pareañ outañ evit kaout blis, war-bouez ober gant un gevredigezh a vez 'hiziv o tistresañ, gouez dezhañ, en un doare ombrek (délirante) (sic) skeudenn ar bed', hep mar na marteze n'emañ ket seurt kevredigezh da vezañ klasket, pell ac'hano, e-touez an dud a ra diouah o gwellañ evit ren o revelezh hervez an doare kristen: e-touez ar re bet digempouset ha tizhet o bred soken gant o revelezh c'houez, kleñvedek, ne lavaran ket.

Jil Egan. Revelezh (sexualité), Bredelfennerezh (psychanalyse), kafezerezh (pratique de confession) dezarnañ (analyse), blis (plaisir sexuel), gwarezioù (préservatifs), bred (psychisme).

Salud deoc'h, Setu va chekenn evit va c'houmanant evit ur bloavesh all. Kalz plijadur am eus bet o wehout stum nevez ar gelarouenn. Ne ket hini ur gazetenn pemdeziek met hini ur gazetenn

sizhuniek. Evidomp e vije un dra pouezus tre kaout ur gazetenn sizhuniek.

Gant va goure'hemennou gwellañ evit skipailh Bremañ. N. Bertin.

Kenrouz ker, Dedenus kenañ e oa ar pennad-kaoz gant Sylvestre DA-HAMA e-barzh niverenn Bremañ dibezhañ. Diptus mik avat am eus kavet pennad T. Louarn diwar-benn an devezh stourm aozet gant ar C'houez d'an 21 a viz Meurzh.

"Ar brezhoneg, afer an holl Vretoned" am eus gwelet ivez war ur pegun embannet gant Skol an Emsav. Met tro am eus bet da lenn ivez, soñjoù ar strollad sevenadurel-se war an deiziataer embannet gantañ er bloaz-mañ : Anv ez eus da "ad-sevel Pobl Vreizh" hag evit-se "diskar ar kapitalouriezh" ha "sevel ar sokialouriezh en hor bro"...

Ar Vretoned na votont ket evit ar strolladoù kapitalour (RRR, UDP, PS...) n'int ket c'hoash, 'm eus aon, "an holl Vretoned" ! Ne rebehan ket da Dangl Louarn dispakañ ar pesh zo gantañ war e galon ma c'hell ober vad dezhañ. Plantañ un taol pluenn e-barzh o c'hein d'an dud (eus Emgann, SAB pe eus Lec'h all) a zo o labourat er mare-mañ evit ma vije devezh ar yezhoù un trec'h evit ar brezhoneg, an dra-se a gavan heugus a-walc'h.

Jean-Luc Coat.

BREZHONEG, YEZH OFISIEL !



DEVEZH AR YEZHOU GWASKET PROGRAMM SUL 22/ 03.


- 14.00 : Iledao
- 14.30 : Manu Lannuhel
- 14.45 : Y.M. Kerloc'h
- 15.00 : Prézegenn de Gosses
- 15.20 : Prézegenn (V.Puillandre)
- 15.30 : Andrea ar Gouilh
- 15.45 : KORNOG
- 16.15 : Strollad AR VRO BAGAN
- 16.45 : Leost ha Skolan
- 17.00 : Prézegenn (Per Denez)
- 17.10 : Mikael Kerne
- 17.20 : Nijadenn c'hwizigelloù
- 17.30 : K. Wright -A.Maisonneuve
- 18.00 : E.V.
- 18.30 : Prézegenn (Herve ar Beg)
- 18.40 : Gilles SERVAT
- 19.00 : Bernez Tangi
- 19.15 : Erwan Roparz
- 19.30 : GLENMOR
- 19.45 : Guingo-Bothua

NOTENN : kanaouenn ebet e gallek !

PENNAD-STUR

UN TENNAD-HENT NEVEZ!

UR PAL BEZAN SIZHUNIEK



BREMAN NIVERENN 66 MIZ MEURZH 1987

TAOLENN

Lizhiri	2
Gouel Karaez	2
Pennad stur	3
Galv Skol an Emsav	3
Avel ar spi	4
Avel an trec'h	5
Repuad euskarat	6
Oaledoù	7
Secu - echu...	7
Danvez Lezenn	8
Kendiviz E Paris	9
Brezhoneg FR3	11
Taoliou Pluenn	12
Alamagn- Oksitania	12
Katalonia- Kurdistan	13
Ar walenn SIDA	14
Kan ar Bobl	15
Radio ha brezhoneg	16
Oaled Diwan	16
Sinema	17
Douarnenez sinema	17
Skramm	18
Anna Vezmeur	18
Kemennadennoù	19
Mesk-divesk	20

Pa a skrivemp ar miz tremenet : moulañ hon eus kavet ! Un ti-moulañ "souezhet oc'h bet martez en gwir a c'hello rentañ deomp ar c'ha-ur gavout niverenn dibezhañ lite hon doa kollet abaoe un nebeut BREMAN", ne oamp ket o c'hortoz ar mizioù. Ur priz dereat a vez kinnisouezhadenn hon eus bet ni o welet get deomp, gant an doare-se ez espe- an niverenn o tont e-maez. Souezha- romp kempouezañ dispignoù ha kouma- denn a skrivan, disouezhadenn a vefe nantou... reishoc'h... Gant evezh en doa la- bourer ar skipailh evit sevel ur va- ketenn naet ha kempenn ha... moc'het enaomp bremañ. Ar pal a vo bezañ si- eo bet al labour gant an ti-liesten- zhuniek... Pell emañ Yann diouzh e- nañ. Petra ober nac'h ar skouerennou gazeg evit c'hoash. Ur skipailh kreñv- ha daleañ niverenn miz C'haevrer pe a rankimp kaout evit-se, koumanante- kas anezhañ memes tra ha disañjal ur rien a-walc'h evit implijout un den- gwallzarvoud... An eil diskoulm hon amzer-leun war ar gazetenn... Labour eus dibabet. a chom war ar stern evel ma weil- "Tamma tamm e vez graet e vragoù da

"Diwar fallaenn e sav gwel- Yann" a lavarer. Krogomp ganti'ta; laenn" a lavarer... Re wir eo... Pa d'ur poent ma vez taget ar Brezhoneg- raen anv a wallzarvoud uheloc'h eo e-giz ne oa ket bet abaoe bloave- peogwir eo sklaer ne vo biken, hen zhiou eo seul bouezusoc'h kaout ur- kinniget deoc'h un niverenn ken lous gelaouenn geleier o tont e-maez in- evel hini ar miz tremenet. Un ti- gal e brezhoneg.



BREZHONEG, YEZH OFISIEL

KARAEZ 21/22 A VIZ MEURZH

Ar Stad C'hall, an hini ne- meti en Europa, a gendalc'h da nac'h gwirioù ar yezhoù gwasket zo war he zachenn (Brezhoneg, Euskareg, Korseg...)

Hec'h emzalc'h gant ar sko- lioù DIWAN, da skouer, a zis- kouez splann he youl da beurla- zhañ hor yezh

An danvez-lezenn savet gant Sekretouriezh Stad evit ar Gal- legeriezh, e bal lakaat ar gal- leg da yezh nemeti war dachenn ar Stad C'hall n'eo ket evit sioulaat ac'hanomp

Gervel a ra eta SKOL AN EMSAV hec'h izili ha mignoned, hag an holl Vretoned tomm ouzh gwirioù Mab-Den da vont da Garaez d'an 21 ha 22 A VIZ MEURZH evit gou- lenn ur statut ofisiel evit ar BREZHONEG.

SKOL AN EMSAV

AVEL AR SPI

TRI MIZ EVIT GOUNID

SKOLIOU DIWAN



Nec'het bras e seblant bezañ Minister an Deskadurezh Stad gant skolioù DIWAN : nec'het abalamour ma 'z int 10 vloaz dija ha n'heller nemet meuliñ al labour a vez graet enno ; nec'het c'hoazh abalamour ma sav a-du ganto ez-ofisiel kement kazetenn bolitikel a zo er vro ; nec'het dreist-holl abalamour ma teu anatoc'h anatañ e rankfe bezañ divizet war diazez ar gudenn : peseurt plas ofisiel d'ar brezhoneg ? ■

Skolioù DIWAN ne asantint ket e vefe kemmet o soñjoù kelenn, n'eus forzh peseurt statud (publik pe brezhoneg) a vo kinniget d'hañ a lavare Andre LAVANANT, Prezidant DIWAN, d'an Ao. P. JARRY, Prezidant ar Bodad Sevenadurel (niv. 7) er c'huzul rannvro, Disadorn 14 a viz Meurzh, da vare digoradur ofisiel skol DIWAN Landerne. Aze emañ an dalc'h penañ evit ar gouarnamant.

PLAS AR GALLEG

N'eo ket abegoù pedagogel a zo gant ar Stad pa c'houlenn e vefe plantet eurioù galleg er skol-vamm hag er C.P. Pa c'houlenn Chevenement, daou vloaz 'zo, e vefe lakaet un eur galleg er CP, ne oa ken nemet evit chom hep kaout da cheñch al lezenn. Hiriv, pa ginnig MONORY kevradou da SEASKA e bro Euskadi e c'houlenn ma vefe doujet ouzh an hevelep reolenn (programm galleg ar skol publik a ginnig 10 eurvezh galleg er CP) Daoust ha gouest e vo ar jakobined da vont dreist d'o ideologiezh ?

SKOLIOU PREVEZ KEVREDET E PLAS SKOLIOU PUBLIK KENSTAGET

Sed aze kinnig diwezhañ ar Stad C'hall, diofisiel evit ar poent met roet da c'houzout Digwener 13 a viz Meurzh, da Andre LAVANANT gant Yvon BOURGES, Prezidant ar C'huzul Rannvro.

Daou skoilh a seblant bezañ hiriv evit enframman skolioù ha mistri DIWAN er servij publik, daoust d'an emglev sinet e miz C'hwevrer. Ken gwir all e oant warlene met anatoc'h int deuet da vezañ.

AVEL AN TREC'H

POLITIKEREZH

An hini kentañ a zo e giz m'hon eus lavaret dija, plas pep yezh er sistem kelenn ha dreist holl plas ofisiel ar brezhoneg. Hennezh a chomo da ziskoulmañ ivez 'n eus forzh penaos ma teu skolioù DIWAN da vezañ skolioù prevez kevredet.

An eil avat, a denn ouzh mistri DIWAN kentoc'h evit ouzh ar sistem e-unan. Eus statud mistri DIWAN eo ez eus kaoz ivez pa gomzer eus lakaat DIWAN er servij publik.

Gouzout a ouzer ervat ez eo bet tabudet kement ger a zo e emglevioù miz Du 1985 ha miz C'hwevrer 1986 gant sindikad bras an Deskadurezh-Stad. Soñj hon eus ivez e oa kaoz titularizañ skolaerien DIWAN en emglev kentañ padal n'o doa ken nemet ur statud a eil skolaer en eil emglev (miz C'hwevrer). Anat awalc'h eo n'eo ket meles-tradurezh an Deskadurezh Stad evit degemeret skolaerien a zo bet savet ha desket er maez eus ar fram. *"Danjerus e c'helle bezañ soñj"*, a zo bet soñjet sur awalc'h goude ur veaj studi e Baiona, *"dreist-holl en un departamant e gis hini ar Pyrennees Atlantiques e-lec'h ma vefe enframmet ur 80 bennak a skolaerien eus SEASKA"*.

Implijout ha talvoudekaat da gentañ ar pezh a gaver en diabarzh, araok reiñ plas da re an diavaez (a zeufe ouzhpenn da reiñ kentelioù...). Se a zo soñj ar FEN abaoe pell'zo. N'eo ket nevez met degaset eo bet da soñj en dro war E.P. (Ecole Publique) goude kendiviz Paris.

Gant ur gevrad-kenverañ (unan eus an daou seurt kevradou a vez roet d'ar skolioù prevez) n'eus ket mui eus an afer-se. (Evit ar poent eus an nebeutañ...). Mistri DIWAN a gendalc'h da vezañ gopret gant skol DIWAN, a resev arc'hant gant ar Stad da baeañ anezho.

Ouzhpenn un afer a brederouriezh (publik/prevez, kleiz/dehou) ez eo un afer a c'haloud politikel ivez e-barzh unan eus frammoù diazez ar Stad-

Ar pezh a zo souezhus avat eo penaos ha dre beseurt hent e vez desket seurt kinnigoù nevez : pa tlefont bezañ bet roet da c'houzout da z-DIWAN gant ar Minister pe da vihanañ gant Rector Akademiezh ROAZON, ez eo, Prezidant RPR ar Rannvro, an Ao. Yvon BOURGES, a zo bet paotr ar PTT, skoazellet gant J.L. GOASDUFF (kannad RPR Plabenneg), P. JARRY (maer RPR Landerne) hag an Lt. ALLIOT MARIE (Sekretourez-Stad RPR evit an Deskadurezh) a zegero DIWAN d'ar Gwener 20 a viz Meurzh e ti-kêr Plabenneg. Petra an

diaoul 'ra MONORY (CDS)? Daoust ha ministr e vo c'hoazh a-benn di ? Evit ar poent, ne glever ken nemet Jean-Yves COZAN (Kannad CDS Eusa) o youc'h'al, tra ma c'hell, war ar Jakobined.

Daoust ha savet e vo ur strollad politikel nevez e Breizh a-benn nebeut ? "Les Girondins de Bretagne" for example ! (ha n'eo ket ken eus a v-BOURDEL). Gwir eo emae o vont da hetin daou c'hantvet deziz ha bloaz an dispac'h gall e Breizh dizale.

J.K.



**Lennit
al liamm**
Skrivañ da : AL LIAMM
16, strada des Fours à Chaux
35400 - SAINT MALO -

Koumanant bloaz 120 lur (studierien, tud dilabour : 100 lur)

KARAEZ

KOLDO

KASET DA VRO SPAGN



Abae miz Gwengolo 1984 ez eus pemp repud euskarat o vevañ e-touez poblañs Karaez. En urzh mat emañ o fape-riou. Ingal e vez advezet o gwir da chom eno gant ar Prefedti daoust ma oa bet ret stourm evit-se ouzhpenn bloaz 'zo. Lojet int bet en un doare ofisiel kenañ gant an ti-kêr, e-barzh un H.L.M. Degemeret int mat gant tud Karaez, hag en un doare ispisial gant an emsav breizhek hag ar greizenn sevenadurel he deus kemeret an anv euskareg "EGIN". Degouezhet e oant, gwir eo, a-raok na vefe bet divizet gant JOXE, a oa Ministr Diabarzh ar Stad C'hall, d'ar c'houlz-se, difenn ouzhp pemp departamant Breizh degemer repuidi Euskadi.

D'al Lun 2 a viz Meurzh diouz ar mintin, avat, eo deut an archerien da glask war-lerc'h unan anezho, Jose Luis Lizaso URETTA, er gêr. Dalc'het eo bet e-pad c'hwec'h eur ben-nak ha lezet da vont. Met, diouz an abardaez, war-dro c'hwec'h eur, eo deut adarre an archerien da dapout anezhañ en un ostaleri e kreiz kêr. E-pad an noz eo bet kaset kuit da v-Madrid, etre daouarn polis

Bro-Spagn, hervez an doare anvet "mall diharz". Enkrezet bras eo bet e gamaladed ha kounnar a zo savet e kalon e vignonad hag an dud a zifenn gwirioù Mab-Den e Karaez hag e Breizh. Hervez ar Prefedti, en dije an euskarad, a vez graet "Koldo" anezhañ "lakaet en arvar an urzh vat dre ma oa esel ur bagad sponterien".

MANIFESTADEG HA ...

LAOSKET DA VONT

Kerkent eo bet lakaet ur galv gant an U.D.B., Emgann ha kreizenn sevenadurel Karaez da vont da vanifestiñ an deiz-war-lerc'h dirak an ti-kêr. Daou c'hant a dud o deus respontet e-giz-se war ar prim.

Jean-Pierre JEUDY, maer Karaez, n'eo ket bet tener gant ar galloud : "E-giz e gamaladed repuet amañ, e chome Koldo Ure-ta en un doare reizh, ha n'heller ket asantiñ e vefe lammet kuit ar gwir da chom e-giz-se. Souezhus eo, ma oa dan-gjemus an den-se, e vefe bet lakaet kement-all a amser gant an dud e karg da vevañ e oa poent

bras skarzhañ anezhañ. Lavarout e veze direnket an urzh vat gant ar paotr-se n'eo nemet ur farsadenn. 'M eus aon n'eus nemet e penn PASQUA ez eus un direnkamant bennak".

Un destenn sinet gant UDB Emgann, PSU Breizh, L.C.R., MAN, Skol An Emsav, Kreizenn Sevenadurel Karaez, a zo bet roet d'ar maer evit prefed Penn ar Bed. "Goulemn a reont groñs e vefe paouezet da argas ar stourmerien euskarat repuet er c'hwec'h-korn, ha genvel a reont an holl strolladoù politikel, sindikadoù, kevredigezhioù gwirioù an dud, ha poblañs Vreizh en he fezh d'en em waniñ evit-se." Goude-se eo aet an holl, dre straedoù kêr, betek plasenn "Gwirioù Mab-Den" a zo bet divadezet ha lakaet da vezañ plasenn "Koldo".

Met, e Madrid, n'eo ket bet dalc'het Koldo URETTA gant polis bro Spagn. Hervez ar gazetenn Ouest-France, eo bet lezet da vont dieub daou zevzh war-lerc'h, hag ez eo aet d'ar gêr en e vro c'hinidik e Guipuzkoa.

T. Louarn

bremañ 6

SOSIAL

KREIZENN AR VREZHONEGERIEN

ROAZHON

E PARIS?



AMZER ZO

Amzer 'zo" a gemenn deomp e vo ur pennad-kaoz gant Leon FLEURIOT, kelenner e Skol Veur Breizh Uhel, d'ar Meurzh 24 a viz Meurzh adalek 9 e. noz Un diskouezadeg skeudennou gant Morvena JENKIN diwar-benn Kerne Veur d'ar Merc'her 25 a viz Meurzh, ha nozvezh gant Yann-

ber PIRIOU gant testennoù farsus pe c'hoapaus diwar-benn ar Vretoned (pe oberennoù Anatol ar Bras), d'ar Meurzh 31 a viz Meurzh. (9 eur noz).

AMZER 'ZO - 20 straed Echange-Roazhon. Pellgomz 99.30.05.95.

PIZH-SKRAGN

"AR RE GOZH ER VERED"

Secu : "Penaos arboellañ, penevez diwar-goust ar re gozh" a lar Seguin.

War Europe 1, d'ar merc'her 25 a viz C'hwever, e-pad keleier ar mintin, e oa bet tro da glevet testeni ur farmasiñ eus Ussel (Corrèze) : Ur praktik 80 vloaz 'm eus, a lar an apotiker, laret em boa deshañ, an devesh all, en defe pelloc'h 400 lur ar miz da rotñ din evit paseñ Louetier n'hall ket diouerit. Respontet en doa din, livet fall : n'hallin ket paseñ ma vez c'hoant lakaat oc'haron da gompren an unan re, n'eus

nemet laret plat ha mat !"
Ur frapadig amzer goude-se, ar ministr Seguin, bet goullet gantañ e soñj, a respontet divezh : "Penaos an tan foeltr e teufen a-benn d'arboellañ e-barzh ar "Sécurité Sociale", anez ober diwar-goust ar re gozh ? Ha c'hwec'h gwec'h muioc'h a remedoù a ya gant ar re gozh evit gant ar rest eus ar boblañs. Nevae..."

Ha 474 miliard a lurioù bet debret gant an Arme, Séguin, PETRA EO ?

Joel DONNART

Ni 'zo un toullad brezhonegerien eus ranvro Paris bet lakaet en o soñj sevel ur seurt "TI AR BREZHONEG", war batrom ar pezh a zo bet graet e Brest, e Roazhon hag e Karaez.

En em roet hon eus da bal digeriñ ul lec'h ma c'hello pep brezhoneger en em gavout ennañ e darempred gant e genseurted, evitañ da gout un digarez da doullañ kaoz war bep dachenn a zo eus ar vuhez a-vremañ ; gant ma vo brezhoneger.

Tu 'vo en em zidiñ en ur bakañ ur banne, en ur c'hoari kartoù pe biroù, met ivez aozañ abadennoù evedus a-bep seurt : prezegennoù, video e brezhoneg, lennadennoù hag all...

Boulc'het mat eo gant al labour dija. Kavet hon eus tud prest d'ober war-dro an ti ha d'hor skoazellañ en ur gas ar c'hant dre drezuvankadennoù. Sur omp evel-se da gaut 2000 lur bep miz da nebeutañ evit ar maer. Met n'eo ket trawalc'h evel just. Kudennoù a zo da vezañ diouestlet (hini al lojeiz da skouer) ha klask a reomp tizhout kalz muioc'h a dud c'hoazh.

Setu perak e pedomp an holl re a zo dedennet gant hor raktres da zont d'un EMOUD MEUR a vo dalc'het d'an 11 a viz Ebrel, adalek 2 eur goude kreisteiz, e "TI AR VRETONED", 22 ru Delambre -75014 Paris.

M'ho peus c'hoant kaout tiz-tourou, skrivit pe bellgomzit da Jakez Vincent - 9 cours De-bille -75011 Paris- pg: (16-1) 43.48.02.39. ; Mark Guilloux, 100 ru Parmentier -78800 Houilles -pg: (16-1) 39.68.28.98. ; pe Radio-Bro (89.4 Mhz) pep gwener da noz. pg: (16-1) 43.73.91.53.




bremañ 7

DANVEZ-LEZENN

AR C'HOG EN DEUS AON KOLL PLUÑV

EVIT DIFENN AR GALLEG



D'ar 17 a viz Kerzu 1986 ez eus bet kinniget gant Sekretour-Stad ar galleg, stag ouz ar C'hentañ Ministr, un "danvez-lezenn diwar-benn implij ar galleg" da brezidant an AGULF (Kevredigezh Veur Implijerien ar Galleg). Goulenn a rae ouz ar gevredigezh-se goulenn alioù an dud diwar-benn ar skrid ha kas anezho d'an itron MICHAUX-CHEVRY a-raok fin miz Meurzh.

Studiet eo bet an destenn gant Komite Bro-C'hall Burev Europa ar Yezhoù Gwasket (Alamaneg, Elzas-Loren, Euskareg, brezhoneg, katalaneg, korseg, flandrezeg, okitaneg). Fall kenañ eo bet kavet gantañ.

"Ma yafe an danvez-lezenn -se betek penn" evezhañ "e vefe savet un aergelo" ha da skouer, gant difennoù ha redioù, kavrioù n'heller ket asantit desho d'io heul, hag enebet ouz frankiz koma sioitaned an vro-mañ". Hervezhañ c'hoazh, e-kerz an XX vet kantved, "n'eus nemet renadoù holivelloù hag o deus difennet war o zachennoù broadel, implij yezhoù diazezet er vro, estregat an hini gredavañ : bez eo bet degouezh Primo de Rivera o lakaat berzh war ar c'hatalaneg."

soch'a vo gant ar mellad 10 a embann : "war an dachenn vroadel ez eo ar galleg yezh an embregerezhioù, en divaez d'an darmpredoù labour gant estranjourien".

Ar mellad 13 a lavar : "Yezh labour ar velestradurezh c'hall o vezañ ar galleg, kement servij publik, ..., a c'hell goulenn ouz an empouherien un droadigezh c'hallek eus an tegermoù a zo gant ar maro hadurazhoù empouheriet ha dasparzhet war an dachenn vroadel".

Gant ar mellad 14 e vefe "ar galleg yezh an deskadurezh publik, nemet evit kelemadurezh ur yezh estren pe ur yezh rannvroel", ar pezh a gasfe da nertra skolioù DIWAN ne gellennont ket brezhoneg, met e brezhoneg.

An enskrivadurioù ofisiel a vefe ar galleg. Netra evit ar yezhoù all.

Komite Bro-C'hall Burev Europa ar Yezhoù Bihan a laka war vel n'eus "lezenn hollek ebet e-keñver ar yezhoù gwasket distaotet e-pad bloavezhioù eus ar vuhez publik" hag e tiskouez "en un doare splann stad ar skolioù er yezhoù bihanañ oa'h ober gan-te evit ul lodenn eus o c'helemadurezh, an dispiz eus deus Minister an Deskadurezh evit ar yezhoù-se gwasket e-pad ur c'hantved a skol e galleg dre vet hag e galleg hepken."

Eveljust, ne ziskouez ket ar skrid mont war-eeun a-enep da yezhoù pobloù all bro-c'hall anvet "Yezhoù Rannvro". Evit difenn ar galleg eo bet savet. Met n'eus anv ebet da reiñ d'ar yezhoù-se ar memes plas, zoken en o bro ha d'ar galleg.

Kement-tra a rankfe bezañ skrivet e galleg, hag e galleg "reizh", an anvioù kevredigezhioù da skouer, an anvioù stalioù, nemet e degouezhoù resis kenañ pa vez merkoù anavezet war an dachenn etrevroadel da skouer.

Skoazell a vefe evit sikour an embregerezhioù. Arc'hant a vefe kavet evit lakaat implij reizherien yezh, troerien, saverien gerioù nevez.

Meneget eo, n'ehe defe al lezenn-se pouez ebet e-keñver ar "yezhoù rannvro" hag al lezennoù a zo evito.

Met peogwir n'eus e gwirionez lezenn ebet en o c'heñver ez aes gwallet peseurt di-



T.L.

STOURM

KENDIVIZ E BRO BARIZ

PESEURT STOURM EVIT AR BREZHONEG ?

Sed aze danvez ur c'hendiviz a voe aozet e Saint-Denis e Bro Bariz d'ar 7 a viz Meurzh 1987. Evit ur saeo dornvezh a-bezh e oa bet bodet eno dileuridi stroladoù sevenadurel ha politikel breizhat, evit divizout ha prederiañ war dzont ar stourm evit ar brezhoneg.

Gant Ronan Tremel e oa bet aozet ar c'hendiviz-se a zeue war-lerc'h meur a daol fall anep ar brezhoneg e skolioù Pariz, met ivez war-lerc'h meur a vanifestadeg e ti-gar Montparnasse o deus brudet ar brezhoneg hag ar stourm evitañ en Enez Frañs. Aozet mat e oa bet an devezh, gant prezegennoù dileuridi un nebeut stroladoù diouz ar mintin, an holl anezhe o kaezel war an dodenn "Peseurt stourm evit ar brezhoneg ?" Bez 'voe stroladoù sevenadurel : KBDF-APLB (Kevredigezh ar Gelennerien Brezhoneg e Rannvro Pariz), Radio-Bro (skingomz lec'hel o skignañ e Pariz abadennoù e yezhoù gwasket ar C'hwec'hkorn), Diwan ha Stourm ar Brezhoneg. War-lerc'h ar stroladoù sevenadurel e voe klevet dileuridi politikel : POBL, UDB, Emgann ha Kevredigezh an Dilennidi Brezhonegerien.

E trede lodenn ar mintin-vezh e oa da vezañ klevet savboent ar FEN hag hini Ministerezh an Deskadurezh. Met ar C'hallaoued a sachas o fri a-dreñv, gant an zonn da brezeg dirak ur saliad tomm a Vretoned pe marteze, peogwir n'o doa netra da laret dezhe. Evit echuiñ eo estranjourien a gomzas, Lucien Jacoby, kargiad e Komuniezhioù Europa, ha Willy Kuijpers karnad broadelour flandrezat e Parlamant Europa, a ziskouezas deomp e c'helle ar vrezhonegerien kaout skoazell er-maez eus ar C'hwec'hkorn.

Jacoby en deus displeget petra oa roll ha labour e vodad hag a zo e darempred gant "Burev Europa evit ar Yezhoù Gwasket". Lavaret en deus sklaer e oa moaien kinnig oberoù evit kaout arc'hant met obererezhioù da varvoudoù ispisial (ul levr, ur c'hendiviz hag all), ne

c'hell ket ar Bodad reiñ ar c'hant evit mont endro skolioù e brezhoneg da skouer.

Willy Kuijpers en deus pouezet war kement-mañ : ur yezh a zo bepred tost ouz ar galon ha lec'h ar galon a zo ar familh, hag ezhom a zo unanif nerzh pep hini evit trec'hiñ, lakaat ar mutiañ posubl a stroladoù (gant ma 'z int demokratel) da labourat asambles. Mod all ez eo prest da skoazellañ ac'hannomp-ni Breizhiz o vezañ ma

Willy Kuijpers dreist-holl a roas deomp kalon da vont war-raok, ha reiñ a reas deomp ur gentel o c'houllenn digant an ensaverien en em unanif evit ar brezhoneg hag o tisplegañ e oa bet eñ e-unan ur bastrouilher panelloù gallek en e yaouankiz. Arabat kaout mezha da stourm evit e yezh !

Goude kreisteiz e voe labourer dre vodad, d'ober kinnigoù resis evit kas ar stourm

war-raok : penaos kreskiñ ar goulenn evit ar brezhoneg, penaos kavout argant, penaos sevel ur c'heñver a nerzh nevez Kirmigz pleustrek eo a voe frouezh ar c'hennlabour-se, da vezañ sevenet war verr dremen, evit kreñvaat hag unanif strivoù an holl stourmerien. E dibenn an devezh e oa lusket-mat an traoù hag a-du e oa ar berzhidi da zerc'hel gant o c'henoberiantiz ha d'en em adkavout e miz Mae.

Labour vat a voe graet an deiz-se, kenkouez evit brudañ ar stourmoù, dreist-holl hini DIWAN hag hini Stourm ar Brezhoneg, hag evit reiñ nerzh ha kalon d'an dud. Gant unantezh e teu nerzh" a skrive Alan Heussaff war Le Peuple Breton, Moarvat eo aesoc'h bodañ ar Vretoned e Pariz eget asañ er vro, koulskoude eo gwir ar c'hennlabour-se e Breizh ivez. Evidon-e eo an devezh-se ur skouer da heuliañ.

I. KADORED



bremañ 9

bremañ 8

FR3

BEC'H AR BREZHONEG

BREZHONEG EN TELE, EVIT PEGEIT C'HOAZH ?



UR GUDENN A CHOM

Ur gudenn a chom koulskou -de... Piv a aozo abadennoù brezhonek da 11.30 eur d'ar Sul vintin pa ne fell ket d'ar re a ra bremañ hen ober...

Ur c'hrogad a zo komañset -Pe e kilo renerezh F.R.3. pe e kilo plas ar brezhoneg en tele hag ar yezh he unan !

Ar c'hrogad-se a zo afer an holl vrezhonegerien, ha n'eo ket nemet hini ar re a labour evit FR3. Ur gartenn-bost a zo bet embannet gant Kevredigezh Tud-a-vicher Sellet ha Klevet ar Servij Publik er Yezhoù Bihan, goulnn a ra digant renerezh FR3 kilan, ha skignañ an abaden brezhonek goude kreisteiz.

Skoazell dilennidi ar vro a zo bet goulnnet met diwar niver ar sellerien engouestlet er c'hrogad-se e vo divizet amzer da zont an abadennoù brezhonek er skinwel, hag hini ar brezhoneg en ur mod...

Bec'h d'ho kartennoù post 'ta, pe gwelloc'h c'hoazh, skrivit ho unan ul lizher

Herve ar BRIZH.

(diwar gemadenenn Kevredigezh Tud-a-vicher Sellet ha Klevet ar Servij Publik er Yezhoù Bihan).

Aotrou Prezidant-Penn-Rener, Diaes e vo din, evel d'ar pep brasañ eus ar vrezhonegerien heuliañ an abaden CHADENN AR VRO ma vez lakaet d'ar Sul vintin.

O vezañ ma n'eo neset bruzhunoù a ginniger d'ar vrezhonegerien e kredan goulnn e vefent lakaet d'un eur dereat.

Herve ar Brizh

Aotrou HAN
Penn-Rener FR3

116 avenue du Pt Kennedy
75016 PARIS

A dalek ar 1añ a viz EBREL eo daou emgav ar sizhun a vo kinniget d'ar vrezhonegerien war F.R.3. Setu ar pezh a embanne renerezh FR3 hep bezañ goulnnet o ali gant ar re a labour evit aozañ an abadennoù-se.

Keleier a vo d'ar Sadorn etre 6.15 eur ha 6.45 eur hag un abaden brezhonek un eurvezh a ginniger lakaet da 11.30 eur e-lec'h an abaden evit an divroidi a vez skignet bremañ. Teir minutenn skeudennoù-bev e galleg a vo lakaet hiviziken, da zispartañ an abadennoù arabek ha portugalek diouzh an hini vrezhonek ; kement ha diskouez n'eo ket ar brezhoneg ur yezh estren e Breizh kenkas ne vefe ket anat ken d'ar sellerien !

Ar pezh a zo tu en em c'houlenn eo pet a dud a vo gouest da heuliañ an abaden da 11.30 eur d'ar Sul vintin pa ne vez ket distro d'ar gêr al lod brasañ eus ar Vretoned.

Nebeud a dud sur a-walc'h ha setu esperañ renerezh FR3. Seul nebeutañ a sellerien, seul esañ en em zisammañ diouzh ar bec'h !

bremañ 10

TAOLIOU PLUENN

GANT LOEIZ MAHE.

KROUIÑ EVIT BEVAÑ

STUMMAN HA KROUIÑ E BREZHONEG



D'ur mare ma hañval an Em-sav, da dud an diavaez anezhañ, bezañ war e daleroù, d'ar mare ma 'n em serr an Ensaverien, al lod brasañ anezhe da vihanañ, en o c'hraouig sioul, e vefe poent deomp holl kregiñ da'n em soñjal war doareoù hag efedusted al labour hon eus d'ober anez mervel evel pobl.

STUMMAN EVIT KRESKIN

Emouez eo pep hini emañ an emskiant vrezhonek o tigrskiñ e-touez ar yaouankizoù ha war zisteraat e ya niver ar skolidi vrezhonek en darn brasañ eus ar skolioù. Ma ne gromp ket da brederiñ war an divout-se ez asantomp teuziñ er bed gall-amerikan a ginniger deomp.

Anat e tle bezañ d'an holl ne c'hall ket ar brezhoneg mont war-raok hep skolidi yaouank er skolioù, ne c'hall ket ar c'helenn brezhonek diorren, niver ar postoù-labour er C'Hapes kreskiñ (5 e 86, 3 e 87). Niver ar studierien vrezhonek er Skol Veur a zigresk da heul, hag izelaat a ray live ar studioù brezhonek. Nebutoc'h a dud stummet gouest da gelenn er skolioù a vo eta, e re ar Stad pe e Diwan (gwashoc'h er sko-

lioù katolik !). Hiziv e vank ar skolaerien ez ezhom gant DIWAN : penaos e vo kavet ar gelennerien eil derez ? Hag ar sekretourien, troerien, skrivagnerien...

Ar pouez a zo da lakaat war gelenn ar yezh, war stummañ komzerien nevez, anez en em gavout an-unan en ur bed holl-c'hallek. Kalz re a gëriou eus Breizh n'eus tamm skol vrezhonek ebet enno. An dud a oar ar yezh koulskoude eo dezhe da reiñ anezhi en-dro dezho. Kreskiñ pe mervel ? Aze emañ an dalc'h.

Lavaret e vez alies ne zeu tost kanaouenn nevez ebet na levr nevez er-maez e brezhoneg... en ur bloavezh ! Ar vuhez sevenadurel brezhonek n'eo ket eus ar re vuhezekañ. Ha n'eo ket er stad-se e c'hell dedennañ ar yaouankizoù.

Mard eo bev hon yezh eo ret he lakaat da dalvezout evit krouiñ : levrioù, c'hoarioù, e-vel just. Met dreist-holl a gredan, kenderc'hoù azasaet ouz ar bevezij arnevez : kanaouennoù ha filmoù. "Ar vrezhonegerien emskiantek", evel a larer, o deus da gompren n'o devo pouez kevredigezhel ebet er-maez eus ar c'hrouiñ. Rak n'eo ket a-walc'h bevezij, ret eo magañ ar

vezezerien, ha ma ne vezont ket maget e brezhoneg e kavint atav ar c'henderc'hoù gall-amerikan (ek)...

Bez e c'hellfer larout eta e tle an holl kemer perzh e buhezekaat ar vuhez vrezhonek : mont a rin betek larout e c'hall an holl hen ober. Rak pep hini a c'hall sevel un tamm senario, pe rak-senario-film (sinopsis), gant sikour gwaz, pe wreg, pe vugel, hag e ginnig da FR3 (pe da v-BREMAN, a c'hallfe lakaat ac'hanoc'h e darempred gant filmerien), hep menegiñ gerioù kanaouennoù da ginnig da strolladoù "rock".

Met krouiñ n'eo ket un ober sevenadurel hepken eo. Un ober armerzhel eo ivez, sellit ouzh DIWAN, STUMDI, IJIN (hep komz eus oaledoù brezhonegerien Brest ha Roazhon). Ha krouiñ labour, evel o deus graet ha n'eo ket an doare gwellañ da c'houtiñ pouez er gevredigezh ? Eskemm zo etre sevenadur hag armerzh : ra gresko an emsav evit ar yezh diwar ar c'hendarempredoù-se.



99-35.11.11.

KANŦV

R oet eo bet deomp da c'houzout marv trumm an Ao. Leon FLEUR10T, d'ar Sul 15 a viz Meurzh 1987. Istorour ha yezhonour en doa tapet brud gant e labourioù war Istor Breizh an amzerioù kentañ. Dre studiañ dornskridoù gant skoazell ar scanner a-wechoù eo deut a-benn da ziskoachañ darvoudoù an Istor chomet dianav.

Don gourc'hemennoù kanŦv a gasomp d'e familh ha d'e holl vignoned. BREMAN



Skeudenn tennet eus ar film «SKLERIJENN» Priz Bras Festival Sinema Douarnenez 1986.

bremañ 11

ALAMAGN

RUZ ,GLAS HA SACH BLEV

UR C'HWITADENN BOLITIKEL



"Un degouezh istorel market" Fisher e Kendalc'h ar re C'hlas

E-pad 14 miz e oa bet un taol-esa digustum e stad Hesse e Bro-Alamagn. En em glevet e oa ar sokial demokrat hag an ekologourien evit ren e Wiesbaden, kêrbenn Hesse. Emeur c'hoazh o klask gouzout hag en ez afe en-dro seurt emglev gant ar gouarnamant kevredel.

Sach blev a oa abaoe pell 'zo pa veze anv eus kreizennou nukleel koulskoude. Un termen zo bet lakaet d'an emglev gant ar Ministr Prezidant Holger Börner. Embannet en deus sklaer e penn kentañ ar miz tremenet ne serrfe ket al labouradegoù nukleel a zo er stad. "Ur c'hwitadenn eo bet an emglev" a embannas Ministr ekologour an E-nergiezh hag an Endro, Jooschka Fischer neuze, hag en gourdrouz rein e zilez. N'en doa ket amzer ober pa voe plantet e-maez ar gouarnamant an deiz war-lerc'h. Ar prezidant a roas e zilez da heul. Votadeg a vo d'ar 5 a viz Ebrel ha muioc'h a vec'h a vo sur mat evit na oa bet da-ou viz 'zo gant ar vouezhiadeg a adlakaer ar c'hañseler Helmut Kohl e penn ar Stad Gevredel. 8,3 % eus ar mouezhioù o doa tkapet ar re c'hlas; an SDP, 37 % eus ar mouezhioù ganti ne oa morse bet ken fall abaoe 61.

"Seul vutañ a vouezhioù a ya gant ar re c'hlas, seul sañjer-rusoc'h e vo hent ar skiant vat evit ar vro" a embanne Willy Brandt, Prezidant an S.D.P.

Ar sokial Demokratat a oar mat tre koulskoude ne c'hell -lint dont en-dro er gouarnamant nemet gant skoazell ar re c'hlas. Ministr Prezidant ar Saar, Oskar Lafontaine a vez kontet giz un den a c'hellfe kemer plas W. Brandt, a glasse broudañ nevez 'zo e strollad d'en em glevet gant ar re c'hlas.

E-touez an ekologourien avat, eo bet kadarnaet ar gostezenn radikal "Fundis", a nac'h treuzvarc'hadou an emglevioù politikel.

Dre ma krog ar c'hampagn-votiñ e Stad Hesse e c'halv Kristen-Demokratad ha Liberaled o voterien da sevel a-enep d' "ar Reuz Glas-Ruz". Laouen e vefent oc'h adkavout ur stad a oa chomet gant an Sokial Demokratat abaoe 1946. M'o deus c'hoant derc'hel o flas ne c'hell tud an SDP nemet klask un emglev gant ar re c'hlas a c'hellfe padout. N'o deus nemet un nebeut sizhonioù evit-se.

Yann Pennhaeg.

OXSITANIA

MAPAMONDE

Kinnig a ra bremañ Institut ar Studiou Oksitan ur c'hannadig "Mapamonde", a gaver ennañ keleier diwar-benn ar yezhoù hag ar pobloù bihan. Setu amañ da heul palioù ar c'hannadig-se :

-broudañ ar pezh a ra ar c'hevredigezhioù o tifenn gwirioù Mab-Den ha re ar pobloù bihan.

-kinnig al levrioù hag ar c'hazetennoù a bled gant an danvez-se.



■ Petra a gaver en nive-renn gentañ ? Kinnig devezh-stourm an 21 a viz Meurzh, kaset gant CONSEO ; burev europeat evit ar yezhoù bihan ; CAOC (Kuzul Mignoniaj Oksitania-Kataloungna) ; Strollad evit gwirioù ar minorelezhioù ; Survival International ; tro ar c'hazetennoù, al levrioù hag ar pladennoù. Skrivet eo e galleg hag en Oksitaneg, teir gwech ar bloaz e teuy er-maez.

Koumanant 30 L. I.E.O./Alan Roch 11290 Arzens.

I.E.O. (brezhoneg gant J.Donnart).

BEP DAOU VIZ LENNIT

AL LANV

59, hent

KERDRONIOU VIHAN
28000 kemper

KOUMANANT BLOAZ : 70 lur
SKOAZELL : adalek 100 lur.

KATALONIA

SIZHUNVEZH BREIZH

E BARSELON

Aozet dindan baeronezh "Daoulagad Breizh", M.J.C Douarnenez, Kuzul Sevena-durel Breizh, Kuzul Rannvro Breizh ha Kuzul Departamant Penn-ar-Bed, bez vo ur sizhunvezh a-bezh diwar-benn Breizh e Kataloungna eus an 21 d'ar 25 a viz Ebrel. E-pad ar sizhunvezh-se e vo klasket broudañ an eskemmoù sevenadurel hag ekonomikel. Mont a raio di pennoù bras ofisiel ar vro, prezidant ar c'huzul rannvro en o zouez, ha degemeret e vint gant pennoù bras Kataloungna eveljust ha gant Prezidant ar Generalitad. Met digor eo ar veaj d'an holl re a vefe plijet da vont du-hont. Ur veaj dre garr-boutin a vo aozet o loc'hañ eus Douarnenez.

Loc'hañ a raio ar c'harr d'al Lun 20 a viz Ebrel.

D'ar Meurzh 21 : kinnig ar Generalitad ha rann ar Sevenadur. Digoradur ha diskouezadegoù.

D'ar Merc'her 22 : Kejadenn etre Kuzul Rannvro Breizh hag ar Generalitad. Gweladenn TV3 evit an tud a vicher.

D'ar Yaou 23 : Prezegennou, listor hag amzer vremañ Breizh, strolladoù GWERZH ha bagad an ALRE, Fundacio Caixa de Pensions, yezh, kelennadurezh.

Degemer ofisiel gant dileuridi Breizh en ostaleri CALDERON.

D'ar Gwener 24 : TV3 evit an holl - Gilles Servat -

D'ar Sadorn 25 : gweladenn savadurioù sevenadurel hag amzer vak.

Distro d'ar Sul 26.

Ar roll a c'hellfe bezañ cheñchet tamm pe damm. Etre 1000 ha 1500 lur e koustfe ar veaj gant al lojeiz hag an dijuni. Ar predoù all a vefe da baeañ, nemet pa vimp degemeret eveljust.

Evit enskrivañ pe kaout titouroù : Gilbert LE GUILLLOU

M.J.C. DOUARNENEZ
Boulevard Camille Reault
29100 Douarnenez

98.92.10.07.

KURDISTAN

MEZH RUZ

TURKIA E PENN KUZUL EUROPA



O treuzvarc'hata an demokratelezh E.Shultz ha Turgut Ozol lañ ministr Turkia

Diabao an 20 a viz Du '86 hag evit ur bloavezh, emañ Turkia e penn Kuzul Europa, a zo ennañ 21 stad europat oc'h embann ur "mennad a zemokrasiezh hag a frankiz".

Votet o doa holl vinitred-an-diavaez ar 21 stad, e Strasbourg d'ar 24 a viz Ebrel '86, evit lakaat Turkia en o fenn, nemet 6 stad a oa chomet hep votiñ -Chipr, Danmark, Bro C'hres, Luksembourg, Malta ha Norvegia.

Nebeut a bouez o do bet 'ta klemmoù stank ur bern kevredigezhioù o tifenn gwirioù Mab-Den, hag a lare ne oa ket Turkia e-tailh da c'hoari "koustiañs moral Europa demokratel", pell a-se ! Muioc'h a-bouez zo gant ar 600 000 soudard kaset gant Turkia, ezel eus an OTAN, da ziwall he harzoù gant

an URSS, Iran hag Irak o vrezeliñ.

Gout a oar an holl zo 15 000 prizoniad politikel e Turkia ; tailhet eo kemañ-kemañ al libertezhioù ano, dreist-holl evit an 12 milion a Gurded n'o deus ket droed c'hoazh kaozeal pe skrivañ o yezh -difennet eo hervez al lezenn, 3 bloaz toull d'an neb a vez paket o kurdegañ en ul lec'h publik... - ; dal-c'het eo 18 bro ar Reter (ar C'hurdistan turk eun-hag-eun) gant an arme turk a vez lezet d'ober he lezenn, ken dichek ha tra, da waskañ ar boblañs ha da vourveiañ, hardi piti ! Ur skwer vat a zemokrasiezh eta, a zo en he fenn ar jeneral EVREN abaoe 1980. Hag ur prezidant a-zaore evit Kuzul Strasbourg, gant ar vevh ruz !

Joel DONNART.



YEC'HED

AR WALENN

50 000 DEN LAZHET



Un interamant en Ouganda : ur vallozh

glañvourien e Rwanda ez eus bet kavet 32 genc'hoarier da bep hini, well-wazh. E kreiz ar vandennad e vefe bet tizhet etre 15 % ha 25 % eus an dud gour hervez ar mikrobiologour belgiat Peter PIOT. E Lusaka, kêrbenn Zambia eo bet kontammet 16 % eus an dud gour, 30 % eus paotred ar gêr en o zouesk. Bugale ivez a zo bet kontammet dre o mammou, pe dre reiñ gwad dezho pa vezent taget gant ar malaria. E Rwanda e vefe bugale 22 % eus ar glañvourien.

Tarzh ar c'hleñved a zo bet skoazellet gant lure ar gouarnamantoù d'ober un dra bennak. Pa 'z eus bet soñjet embann skritelloù da vrudañ an dañjer en Ouganda, n'int bet troet nemet e 10 yezh, pa gomer 22 yezh disheñvel er vro. Poan o deve an dud o kredañ e abegoù an droug. "E-pad bloave-

Pemp bujel he deus Josephine Najingo, eviti da vezañ 28 bloaz. Ar pep brasañ eus hec'h amez e vez aezet war ur vatarasenn-blouz, dirak he zi e Kyotera, ur gêr gonerzhel en Ouganda, stok ouzh harzoù Tanzania. Koll a ra he nerzh gant ar foerell, ar boan-goug hag an debron a zev he bruched hag he divrec'h. Emañ o c'hortoz mervel.

bet karget gant Ministrerezh ar Yec'hed da stourm ouzh ar c'hleñved er vro.

Hervez Aozadur Bed ar Yec'hed en defe bet lazhet ar S.I.D.A. 50 000 DEN da nebeutañ en Afrik hag UR MILLION HANTER a dud a varvo en ur ober dek vloaz ma ne gaver ket ur vaksin


E 1970 e oa bet kavet ar glañvourien gentañ e-touez gisti afrikan ; 30 bro a zo bet tizhet gant ar viruz an deiz hiziv ; ar pezh a ya d'ober "Bandennad ar S.I.D.A.". En ur studiañ darempredoù-reizh ar

Leun e vez straedoù ar gêr a vugale hep na kar na ti. Miliadoù a dud a zo marvet dija tro-war-dro gant ur c'hleñved misterius, miliadoù a dud all a varvo c'hoazh... Ar sorserezh a oa bet lakaet da benn-kaoz ar walenn da zigentañ-penn, met gouzout a reont bremañ eo ar c'hoari-daou a zo kaoz p'o deus gwelet an droug o spegañ diouzh ar gwazed ouzh ar gwager.

Ar reuz a zo e Josephine a zo hini Kreiz-Afrika : ar S.I.D.A. Evel ur walenn gozh eo kouezhet ar c'hleñved war greiz an douar bras ha ne vo ket pell da astenn betek ar c'hornog hag ar c'hreisteiz. Pep 4 pe 6 miz e vez doublet niver ar glañvourien en Ouganda "Er bloavezh 2000 e vo bet tapet an hantrez eus an dud gour", hervez an Dr Samuel OKMARE a zo



Ar familh Najingo : gortoz ar marv !



Brudañ an dañjer

KAN AR BOBL

BRO DREGER HA BRO OUELO

MILIONOU EN ARVAR

27/28/29 A VIZMEURZH



ar broioù paket ar muiañ

ZAIRE
OUGANDA
RWANDA
BURUNDI
TANZANIA
ZAMBIA

shioù e oa bet graet e-gis-se ha n'eus bet netra ar-seurt-se, biskoazh !" a glever alies gant tud o deus diegi cheñch o boazioù reizh. Brudet fall eo ar gwarezioù ouzhpenn-se, un dra lous e chom evit ar pep brasañ eus an dud. Un emalc'h kontrol a gaver e-touez ar re zesketañ zoken. Da genger ur brezegenn dirak studierien war ar medisinerezh e Skol Veur Zambia e oa savet youc'hadennoù goapaüs pa oa anv eus an dañjer da gaout kalz a genc'hoarierien disheñvel.

de e tispigner kement a arc'hant oc'h ober war dro 10 european klañv gant ar S.I.D.A. evel ma reer evit kas en-dro un ospital bras e Bro Zair. Ret e vez d'ur medisin afrikan dibab. Gant nebeut a arc'hant e c'heller pareañ un danijenn skevent pa vefe foetet arc'hant e leizh da louzaouiñ en aner un danijennempenn deut diwar viruz ar SIDA

Ne weler ket c'hoazh roud ar c'hleñved war ekonomiezh Afrika. Ne vo ket pell a-raok bezañ anat koulskoude. Etre 19 ha 40 vloaz e vez ar pep brasañ eus ar glañvourien. "Ar re a ves o verveñ bremañ a zo ar re gaoant a oa bet disket evit kas o broioù war-raok" eme ar mikrobiologour P.PIOT. Al lod brasañ eus ar gouarnamantoù a nac'h gwelet dañjer ar c'hleñved zoken. E bro ZAMBIA eo bet difennet ober anv anezhañ er c'hazetenoù. Ma ne bled ket ar gouarnamantoù afrikan gant ar gudenn, n'eo ket ar broioù all a ray en o flas. N'o deus deour ganti ar broioù dioroet n'eo nemet ablamour d'an dañjer a zo evite. N'eus ken 'met gwelet ar pezh a reer evit skarzhañ diouzh ar peurrest eus ar blanedenn ar c'hleñvedoù aet diwar-wel en Europ hag e Amerik an Hanternoz.



Diaes dibab : klañvour ha medisin e Tanzania

D'an 28 ha d'an 29 a viz Meurzh 87 'vo dibabet e Ker Roc'h ar ganerien hag ar strolladoù deus bro Dreger ha bro Oueloù evit Kan ar Bobl an Oriant. Ar c'hevredigezhioù "Ti Villaj" (Ker ar Roc'h), "Awel-Dro" (Kanton ar Roc'h), "Newez Amzer" (Tregastel), Skol Sonerezh Bear-ar-Roc'h Derrien a bed ac'hanoc'h da zont da genger perzh e-barzh ar gouel-se evit difenn ha sikour sevenadur Breizh hag ar Brezhoneg.

Ar gouel-se a grog d'ar gwener gant ur veilhadeg-vido diwar-benn "An Tunodo" e sal an Ti-Kêr. Diskouezadegoù 'vo ivez gant Ti-Villaj "Ker ar Roc'h Gwechall" hag Awel Dro "C'hoarioù Had Pardon e Bro Dreger".

D'ar Sadorn vo ur FEST-NOZ goude ur c'hoñkour sonerezh daou-ha-daou digor d'an holl sonerien. E-pad ar fest-noz 'vo konkourioù akordeoñs diatonek ha kan ha diskan.

D'ar Sul goude mervin vo gwelet war al leur ar vugale o kanañ, evel ar re gosoc'h (Gwezioù-Soniou), ar strolladoù sonerezh hag ar ganerien heuliet gant sonerezh. Ar re wellañ vo pedet en Oriant.

KAN AR BOBL BRO DREGER



AR ROC'H DERRIEN 27 28 29 A VIZ MEURZH

Yann PENNHALEG.

bremañ 15

RADIO

OALED DIWAN

AR BREZHONEG WAR AR RADIO

**C'HOARIVA
EVIT AR VUGALE**


GANT STROLLAD AR VRO BAGAN

N'eo ket druz ar peuriñ war ar radio brezhonek e Breizh. Ur c'houplad eur-vezhioù beb sizhun peurliesañ, n'eus nemet Radio Breizh lzel ha Radio Kreiz Breizh a ro un tamm plas d'hor yezh. Pell omp deus al lusk a oa er penn kentañ gant ar radioioù "dieub" hag a glasse chom tost eus an dud. D'ar mare-se meur a vrezhoneger o deus kemeret perzh e labour ar radio, bremañ p'emañ al lodenn vrasañ eus ar radioioù o vont gant chadennoù a zo o fenn e Paris, ne vez ket komzet ken eus ar vro gante.

Bro Dreger, Poher, Min Du, Fusion, Cotiàre... N'eus ket ken ha n'eo ket dre faot renerien ar radio peurliesañ, met dre faot ar vrezhonegerien o deus dilezet an dachenn. Gwir eo n'eo ket aes labourat e brezhoneg en ur radio lec'h n'eus nemet tud yaouank oc'h embann noz deiz sonerezh rok-pop peurliesañ hag o c'hoarzhin yud gant ar brezhoneger.

Memes tra, arabat kuitaat an dachenn. E-giz lare Sten Charbonneau e niverenn diwezhañ Bremañ, seul wanoc'h plas ar yezh er radioioù prevez, seul diaesoc'h derec'hel plas hor yezh er servij publik. Poent pegan e-barzh !

Pelec'h emañ ar brezhoneg war Radio Alpha (Roazon), Contact (Brest), Bro Vigoudenn,



ABADENNOU BREZHONEK WAR RADIOIOU BREIZH

Radio Breizh lzel.....93 Mgz	Kemper	LMMYG	1.30-2.00 g.k.(divy.) 7.20-8.30 g.k. 7.20-9.00 g.k. 7.20-10.00 g.k.
<i>Keleier bemdez da 7.15/8.20/mintin ha 7.30 goude kreisteiz</i>			
Radio Arvorig.....M.F.	Roazon	Sad.	12.00-2.00 g.k.
Radio Kreiz Breizh.....99,2	St Nig.	LMMYG	9.00-10.30 mintin 6.00-7.00 g.k.
<i>Keleier bemdez da 12.30</i>			
Radio Bro Gwened.....97	Bubri	Sad.	1.30-3.00 g.k.
Radio Santez Anna.....88,2	Stez A.	Sad.	5.30-6.30 g.k.
Radio Bro Leon.....103,4	Lesneven	Sad.	12.00-1.00 g.k.
Radio Emeraude.....101,7	Plougeme	Sad.	10.00-11.00 mintin
Radio Pays.....89,4	Paris	Gwen.	10.30-1.00 g.k.

Dalc'het ez eus bet e Treglonou e-pad eil sizhun-vezh vakañsoù miz C'hwevrer ur staj c'hoariva e brezhoneg evit ar vugale.

Aozet e oa gant OALED DIWAN ha kaset eo bet en-dro gant un animatourez deus Strollad Ar Vro Bagan, Nikol ar Vourc'h.

Eus skolioù Diwan,skolioù divyezheg pe skolioù ordinal zoken, e teue ar vugale. 13 e oant ha brezhonegerien an holl anezho. Tro o deus bet da bleu-striñ war dekoù ar c'hoariva (labour korf, labour ar vouezh, deskiñ en em ginnig dirak an dud, labour a-stroll...).

Rannet e oa ar strollad etre daou skipailh, pep hini o pleustriñ war ur pezh c'hoari disheñvel.

AR PRINS OLIER - istor ur priñs yaouank ha ne felle ket dezhañ en em walc'hiñ.E dud a gav un doare dic'hortoz evit lakaat anezhañ d'hen ober...

AR GITAR HAG AR BATATEZENN - Daoust da vezañ gouest da gaozeal e vint taolet o daou war ur bern teilh gant o ferc'henned.Dastumet gant ur c'hlasiker-bara, implijet e-barzh ur sirk, gwerzhet d'ur sultan... e kouezont e karantez an eil evit egile.

Ne oa ket bet disoñjet e oa ar vugale e vakañsoù..., estregret ar c'hoariva o deus bet tro d'ober traoù all, forzh pegement (c'hoari-mell-droad, volley, beilhadegoù...).

Ur staj dalc'het d'an daoulamm kea ! E fin ar sizhun-vezh e oa bet c'hoarivet an div abadenn dirak un hanter-kant bennak a dud ha mikroioù R.B.I. zoken !

Ha strafuilhet e oant gant kement-se a gav deoc'h ? Ket ! Deuet e oa brav ganto me lar deoc'h ! Dazont ar c'hoariva brezhoneg e Breizh ! Rit ket biloù ! War an tu mat emañ !

E. Denez ha M. ar Morvan (animatourien ar staj)

SINEMA

"WELCOME IN VIENNA"

10VET GOUEL FILMOU

GANT AXEL CORTI

DOUARNENEZ



B ez 'ez eus filmoù brav, bravigoù kizellet gant Axel Corti, ez eo un dud o gwelet ha dister e vefe o danvez pe get. "Masques", gant J.P. CHABROL, a zo o paouez dont ermaez, a vefe ur skouer anezho. Eus ur rumad all, kalz rouesoc'h, eo "Welcome in Vienna". Un nebeut filmoù 'zo ne c'hello ket o c'hened hon dilezel.

N'eo ket broudet Wolf na gant ar gasoni na gant an dismegañs pa zeu en-dro, e 1944, en e c'hâr c'henedik, Vienna, en doa ranket tec'hout kuit diouti da vare an Anschluss. Met ar spi a zo ennañ marteze e c'hellfe sevel ur vuhez nevez war zimantrou ar bed kozh goude ma vije bet argaset "al loen euzhus". Ur yuzev eo Wolf evel e vignon Adler. Degemer o deus kavet e bro Amerika hag en enrollet en arme amerikan, met distreiñ d'an USA ne fell ket dezho. Hag en ul lec'h bennak e vefe ur maen ma c'hellfe ar Boudedeo harpañ e benn warnañ?

Evel an holl re o doa kredet enebiñ ouzh an Nazied hag o doa gwelet lazhadeg o breured e tihun Wolf hag Adler da zevezhoù kentañ ar peoc'h gant ur galon frailhet hag ur c'hoanag divent.

Piv a gemerfe lod en o huñvre ? Tannet o gwiskamant soudard diwarno n'int nemet

spesoù en em zistroio an holl diouto.D'ar re drec'het ne fell nemet disoñjal, adsevel o zier, ha tanva d'o zro chikolad ha butun bro Amerika : "Dreñ a ra ar rod ; n'eus ken met derec'hel da vont !".

Peseurt bro a vefe da uhelvennadoù Wolf hag Adler ? Peseurt bro d'an ene ?

An arz a vefe diouzh gwelet film Axel Corti. Divizoù, skeudennoù brav-meurbet 'zo e "Welcome in Vienna" e chomo en-louc'het ganto spered an arvesterien.

E gwenn ha du eo ar skeudennoù evel meur a film kozh hon bos bet tro da welet diwar ar brezel diwezhañ. Met an Harozed zivral a zo aet da c'hoari war ul leur all, e filmoù Rambo pe "Out of Africa". Er vered goloet gant an erc'h, lec'h ma oa bet douaret Mozart, e kantren oa bet bugale diantek, korf marv o isbugale ozh o stlej. Estlamus ha disi eo ijin ar c'hoarierien. Er salioù "Art et Essai" e vez diskouezet "Welcome in Vienna".

Mark ar BRIZ.

Sac'hig : Un drilologezh en deus savet A.Corti gant " Dieu ne croit plus en nous", "Santa Fe" ha "Welcome in Vienna". Bez e c'heller mont da welet pep hini anezho hep brezañ gwelet an daou all.

28 A VIZ EOST / 6 A VIZ GWENGOLO

Gouestlet e vo er bloaz-mañ da bobloù penn-ahel an Hanternoz (Sam, Inuit, Hanternoz Siberia, Yakouted, Ameriandianed) ha d'un distro war ar bobloù a zo bet gwelet abaoe ar penn kentañ.

War un dro e vo savet ur c'hendiviz diwar-benn ar " yezhoù ha sevenadurioù minorelaet hag ar sellet ha klevet".

Ur festival war an ton bras e vo er bloaz-mañ. War daou zibenn sizhun. Souezhadennoù a vo.

KILAOUENN
Kuzul-Deiz
Brezhoneg - gallec

36-15
TC / KELA

- Keleier ar vro
- Gouelioù, Festoù noz
- Lerc'hoù nevez embannet
- Stal Ulz Ar Vro
- C'hoarioù
- Kentelioù brezhonek

KINIG LABOUR HANY

Emañ OALED DIWAN o klask animatourien evit e greizdennoù vakañsoù a vo ar bloaz-mañ d'an : 19/25 a viz Ebrel, d'ar 5/18 a viz Gouere, d'ar 1/12 a viz Eost (an tri-se evit bugale etre 6 ha 12 vloaz). Ha d'ar 16/28 a viz Eost, evit ar grennarded (12/15 vloaz).

Ar re a vefe dedennet a rankas ul lizher hag ur C.V.e brezhoneg da : Erwan Denez.

OALED DIWAN
KREIZENN SEVENADUREL VREZHONEK
29214 - TREGLONOU

98-04.07.04.

bremañ 17

SINEMA

SKRAMM

KELAOUENN AR SELLET HA KLEVET E BREIZH



Vigoudenn (7-13 a viz Eost),
Kemper (20-29 a viz Meurzh).

Kaset eo bet an niverenn
mann d'an holl dud e karg e 5
departamant Breizh (kuzulioù
meur, Kuzul Rannvro, deputeed,
senatourien) ha da dud oberiant
war an dachenn gevredigezhel.
Kaset e vo evit netra d'an holl
re a vo intereset.

Niverenn 0 ur gazetenn ne-
vez zo deus er-maez e miz
Meurzh. "SKRAMM" eo hec'h
anv. Kinniget brav, war baper
lufur, ment 21x29,7, keleier a-
bep seurt e-barzh. Kelaouenn ar
Sellet ha Klevet e Breizh e
fell dezhi bezañ. Gant "Daoula-
gad Breizh" eo bet lañset.

Diouzh an niverenn-se, 12
pajenn founnus a-walc'h, ez eus
da grediñ e vo digor ar gaze-
tenn war gement-tra a sell ouz
ar sellet ha klevet, a dost pe
a bell. Kavout a reer pennadoù
diwar-benn an orjalenn e Roazon
(15 chadenn), ACAV Sant Kadou,
FR3 Breizh P.d.L., an ARC (At-
elier Régional de Cinéma), kevre-
digezh nevez savet Sinemaourien
Vreizh, skouerioù implij tekno-
logiezhioù nevez pe embregere-
zhioù o labourat ganto, danevel-
loù un toullad filmoù ha keleier
a bep seurt : rentaoù kont
beaj-studi dilemndi Breizh e
Kembre, kendiviz Bro-Sardegn
diwar-benn ar yezhoù gwasket
hag ar sellet ha klevet, hag a-
hend-all kemenn ar c'hendivizoù
ha kejadegoù da zont, Inverness
(6-10 a viz Ebrel 87), Brest
(12-15 a viz Meurzh), Bro-

SKRAMM
B.P. 121
29174 DOUARNENEZ CEDEX
☎ 98.92.97.23.



A navezout a rit Anna Vez-
meur? Ne vin ket souezhet
ma n'ho peus morse klevet
anv anezhi. Ha laran deoc'h eo
ur skrivagnerez vrezhonek he
deus bet milieroù a lennerien
evit he Istor Breizh e c'hel-
loc'h bezañ souezhet. Un nebeut
linennoù a oa bet embannet war
he fenn gant ABEOZEN en e Istor
Lennegezh an Amzer Vremañ, met
dianav e oa d'ar peb brasañ eus
ar vrezhonegerien a-vremañ.

Aziliz Grall, Leanez e
Breuriez ar Spered Glan evel
ma oa Anna Vezmeur araozi, he
deus bet klasket diguzhañ ar
bajenn-mañ eus istor hon lenne-
gezh. Studiet he deus skridoù
ha buhez Anna Vezmeur koulz hag
ar pezh a zo bet skrivet war he
fenn betek-hen. Un doare da stu-
diañ Istor Breizh ar c'hantved
tremenet eo ivez...

Zoken ma n'eo bet morse
Anna Vezmeur ur skrivagnerez a
dalvoudegezh vras evit hon lenne-
gezh e oa dleet ober al la-
bour-mañ ha pa vefe evit lakaat
ac'hanoep da gompen gwelloc'h
bretoned ar c'hantved tremenet.
(Ul leanez skrivagnerez : Anna
Vezmeur - Emb. Hor Yezh -).

Ur riskl a zo marteze :
e trofe pennadoù "zo d'ar bru-
derezh ha d'an emveulin". Ar san-
timant-se a zo o lenn ar pennad
diwar-benn FR3 da skouer. Gort-
oz a reer ivez e vefe klasket
ar pezh a c'hell bezañ graet e-
vit gwellaat stad an traoù, ha
lavaret ar pezh a vank. Met,
n'eo ket echu. Danvez a vo
c'hoazh, rak kemennet e vez de-
omp pajennoù ouzhpenn evit an
niverenn 1. Ma n'eus pennad
brezhoneg ebet, moarvat e vo
prest ar renerien d'o degemer,
seul vui ma c'houlennont ouz
an holl kas dezho keleier ha
danvez. Youenn JARDIN eo a zo
e karg ar gazetenn hag Erwan
MOALLIG eo ar rener. Ur benveg
talvoudus kenañ, deut ur wech
c'hoazh eus Douarnenez.



Anna Vezmeur

KEMENNADENNOU

BEAJ EN EUSKADI

SPORT

E BREZHONEG



Komite Breizh-Euskadi Sant
Nazer a gemenn e vo aozet
ur veaj dre garr-boutin,
evit dibenn-sizhun Pask da geñ-
ver 50vet deiz-ha-bloaz bombe-
zadeg GUERNICA gant an nazied.
Ar c'harr-boutin a guitao Sant-
Nazer dre Naoned d'ar Gwener 17
a viz Ebrel da 10 eur noz, ha
deut e vo en-dro en noz etre 11
Lun 20 hag ar Meurzh 21 war-dro
hanternoz pe div eur mintin.
War-dro 300 lur e kousto ar
veaj. Plas vo da gampiñ du-hont

(prejoù marc'hadmat).

Bez e vo sonerezh, dis-
kouezadegoù d'ar Sadorn, Gouel
Broadel an "Aberri-Eguna" d'ar
Sul ha kendalc'het e vo d'al
Lun.

Titouroù, enskrivadurioù ar
buañs ar gwellañ :

Sant Nazer 40-70.42.50.
Naoned.... 40-93.04.81.

STAJ GOUREN
18 HA 19 A VIZ EBREL

Ar staj-mañ hag a vo koulz
evit an deraouidi hag
evit ar re a oar gouren e
vo kaset e "TI AR GOUREN" e
Berrien. Krog e vo a-benn ar
Sadorn 18 da 3 eur abardaez hag
ez echuo d'ar Sul 19 e-tro 5 e.
abardaez. Roll oberiantizoù an
daou devezh-mañ a denno da ge-
ment-mañ :

- .Displegañ dre vras petra eo ar gouren
- .Deraouiñ gant ar gouren
- .Displegañ petra eo ar gourenoù keltiek
- .Pleustriñ war Istor ar Gouren hag all...

Evit-se e vo labourer gant
filmoù hag e vo pleustret kement
war ar pallenn hag e diabarzh
ur sal.

Priz ar staj : 100 lur (bod
ha boued)degas ur sac'h kousket

Titourit : "Ti ar Gouren", ar
Poullig - 29218 - Berrien -

☎ 98.99.99.44.


DEVEZH AN OKSITANEG 21 A VIZ MEURZH

D'an 21 a viz Meurzh, de-
vezh kentañ an Nevez-hañv
e vo graet ur vodadeg
vras en ELSINAS (33) evit difenn
an oksitaneg ha kultur oksita-
nia ; plantet e vo ur "Wezenn-
ar-Yezh", abadennoù a-bep seurt
a vo evit diskouez buhez ha ye-
c'hed kultur ha yezh Oksitania.

War-dro an 21, e vo aoz-
zet, un tamm pep lec'h dre ar
vro, abadennoù ha dibunadegoù
gant ar c'hevredigezhioù oksi-
tanist.

Embann gwirioù an oksita-
neg, ar c'hellenn hag ar skignañ
anezhañ dre ar skolioù hag ar
media e oa pal an devezh-stourm
-mañ, a-du gant stourm ar pe-
bloù bihan hep Stad en Europa
o sevel o mouezh ivez d'an 21
a viz Meurzh, galvet gant
CONSEO (bodadeg ar broadoù hep
stad en Europa ar C'hornaoueg).

I.E.O.
(brezhoneg gant J.Donnart).



MESK DIVESK

Digor ar chase er mare-mañ -roet eo ar maezioù d'un dornad gwazed ! E 1979, 4 eus departamantoù Breizh e oa 94 126 aotregezh-chase ; da lavarout eo 3,6 evit 100 den.

(2,8 % e Penn ar Bed, 4,8 % en Aodoù-an-Hanternoz).

(15 % eus ar vro, betek 30 % en Il-ha-Gwilun).

70 % eus douaroù Breizh a zo digor d'ar chase ; ur milion a zevezh-arat a zo prevez

Dont a ra diaes pourmen war ar maez hep klevout drajez o c'hwibannañ en dro deoc'h !

Er c'herioù mokedet, er straedoù lous-ki, el labouradegoù safarus, er skolioù chirakaet, e pep lec'h er vro paskwalizet, panneloù a vruderezh evit ar gopridi sklavelaet : disterniit diouzh ho

labour, ankounait ho puhez reuzeudik, deuit da huñvreal ganeomp (arabat disoñjal ar chekenn "Ar c'hlub, bravañ gavadenn abaoe hini an eürusted". Ar bruderezh, bravañ douelladeg abaoe ar relijion !



Gant Eurostat e vez embanet ingal sifroù a-zivout an dud dilabour er C.F.E. : e miz Kerzu 1986 e oa 16,4 milion anezho. Ha c'hoazh e skriv Eurostat e tigresk niver ar re yaouank o klask fred. Ya pa ne vez ket kontet an TUC, TIC pe TOC e Bro-Saoz, Bro-C'hall, Bro-Almagn, pe Bro-Spagn. Ha pa ne vez ket kontet al labourerien-douar bihan o c'hrakvevañ reuzeudik

sikouret gant ar Stadoù. Pa ne vez ket konñtet ar re yaouank gant o c'honje en armeoù.

Setu ar sistem armerzhel dislavaret e-unan war ur c'hraf diazez : hini talvoudegezh al labour. Ur brouenn ouzhpenn emañ o kouezhañ en e boull, hag e ranker sevel unan all war ziazezoù all.

Gwelloc'h eget al Loto pe al lotiri evit an dud o deus bet amprestet arc'hant digant ur bank evit sevel un ti : goulenn ur c'hevrad nevez peogwir eo dic'hwezet an arc'hant. Moaien vez espern milionoù evel-se. Met ne vez ket prest an holl diez-bank da respont. Diskleriet eo bet gant ar C'hredit Foncier e kollfe 12 miliard a lurioù ma vefe asantet gantañ izelaat eus 1 % kampi an arc'hant prestet. Un doare da anzav e vez gounezet kement-all bremañ ha muioc'h zoken peogwir ez eus 5 Pe 6 % a ziforc'h etre priz an arc'hant hiriv ha hini 1980.

Epenn kentañ o diskrog-labour e oa bet savet ur genurzhierzh gant ar studieren en diskar amzer. Memestra gant labourerien S.N.C.F disfi ganto ouzh ar sindikadoù.

Ar skolaerien avat n'int ket ken spisel, ha daoust da rebechoù ouzh ar S.N.I. hag ar SGEN, n'eus ket bet kalz a nerzh gant ur genurzhierzh ; ne ouzont ket bremañ penaos kenderc'hel gant o diskrog-labour a-enep dekred CHIRAC. Ne vez hini ebet anezho o c'houlenn e vefe kresket kelligsteuñv an Deskadurezh-Stad a-benn ar bloaz evit diorren anezhi kentoc'h evit kreñvaat hini an Arme. Daoust hag e c'hellomp kaout fiziañs en dud-se evit sevel ha kelenn bugale pa seblantont ken dizesk war aferioù hon amzer ?

Miz Genver, yen an amzer ; miz C'hwevrer Meurlarjez'... War-lerc'h yenijenn ar goañvezh, setu sirk E.D.F. Ur greizenn nukleel a zo ezhomm anezhi e Breizh eme ar sindikad F.O. abaoe an troc'h tredan c'hoarvezet d'an 13 a viz Genver. Ha koulskoude e CHINON, n'eo ket bet gouest ar greizenn da bourchas tredan pa oa ar muiañ ezhomm anezhañ : un degouezh ha ne oa ket bet ijinet gant skiantourien vras E.D.F.

Ha perak eo bet troc'h'het an tredan e Breizh a gav deoc'h ? N'eo ket diaes ar respont eveljust, met gwashoc'h 'zo c'hoazh -an holl a oar bremañ n'emañ ket an armerzh o kenderc'hiañ madoù evit respont ouzh ezhommoù an dud, emañ kentoc'h o kenderc'hiañ an ezhommoù o-unan. Ha petra eta a oa kaoz eus an amzer ken kriz abaoe tri bloaz ? Ne welan nemet un diskoulm skiantel : gant E.D.F. eo bet aozet ha broudet e gwirionez evit ma vefe kresk war ar fakturennoù tredan, hag evit ma vefe goulennet sevel kreizennoù nukleel nevez...

GARAN AR MEUR.



Labour a chomo d'an archerien evit lakaat e gwerzh (war-dro 10 000 l.) tiez an dud rivinet a chomo sammet a zleoù o vuhez-pad ouzhpenn.